

An dukes annan.

V. K. / moalquin et
- Villemarqué -

er blaoues mil eis cant
pa voa laket a saisi voar Guengamp
woar bors lomikel e man ar saason
en allamagnet var bors Roason
var bors treguer man an Islantet
ma heo karguet ker a soudardet.

ar prins denobla a oulene
Deus ar porcher paour nag an de ce
Digoret e vo ar percher man
Dar princ denoblan zo areit(1) aman
Dar princ denoblan zo ariet aman
Trivar mil cavalier zo gantan.

Trivoar mil cavalier dud vaillant
Da laqat ar saisi woar Wengamp
ar porcher paour a respontas
Dar princ Denoblan wel ma e klevas
ne vo ked digoret ar barier man
ken ma mo klevet gant an dukes annan.

ar porcher paour a houlene
deus an dukes annan an de ce
a Digoret vo ar barier man
Dar princ (d)enoblan zo ariet aman
Dar princ Denoblan zo ariet aman
Triwoar mil cavalier zo gantan.

Triwoar mil cavalier tud vaillant
Da lakat ar saisi woar Wengamp.

an Dukes anna a respontas
Dan porcher paour vel ma e klevas
Ma dorjo a zo moraillet
a ma murio a zo cimentet
a pa ven tri mis enter a nen(1)
me ne ran ked a cas ane.
Id tu da carga ar c'hanon bras
Da rei dar Prinç Denoblan woar e fas.
id tu buen al lesse de kargan

triwoar boulet rol a ia ennan
 a quemend al a boulejo rond
 a quemend al a boulejo canon
 a quemend al deus a mindrail vras
 da rei dar prinç denoblan var e fas
 na woa ked e guir perachuet
 ar chanonier paour a zo lac'het
 Digan un ten poul guen dimeus ar Gamb
 digand eur chevalier anoet Garant
 an Dukes annan a lere
 Dan canonieres ag a(n) de ce
 a ma doue pera vo greet
 pa e om c'hanonier paour lachet.

ag ar c'hanon bras chomet braquet
 ar chanonieres a réspontas
 dan du kes annan evel ma e c'hlevas
 ma de ar c'hanon bras chomet braquet
 breman zont a veso losquaet
 me a woel aont eur regument fin
 a chalono e no c'hrei's o chouarsin

bis
 mes breman zont e voint var c'houin
 ne woa ked e guir perachuet
 ar c'hanon bras a zo losquaet

bis
 ag an ol bors a zo digoret.
 ar princ denoblan a houlene
 en ker Guengamp pa entree
 De bonchour a Joa ol er quer man
 a dar merc'het terrublan pa non guelan
 bis
 a laka ar c'hanon bras da vrakan
 Derc'h ma soudardet vo ar merchet koant
 a dime an aour ag an arg'hent(1)
 ar prinç Denoblans a houlene
 en illis Guengamp pa entree
 a contant e verc'h Gouerches vari
 a lakan o ti da verchossi.

Kemerom om c'hesec a Dem en eind
a Lesom o zier gant ar sent.

a secretiri da gao ar guin
 ag o c'hoter bras da dol quigin
 ne woa ked e guir perachuet
 ar cleier da zon zo commencet.
 e commencet ar cleier da son
 ken a epouvante o c'halon.
 ar prinç Denoblan a lavare
 De pachic bian an de ce
 Ke a lesse buan dan tour plad
 Da c'houd piou zo deus o brancelat
 Deus ta daou koste vo sabreno
 Gant ta zaou zorn te combatto
 ar Pach bian a respontas
 Dar Princ denoblanc evel ma e klevas
 e bars an tour plad me a zo bed
 Netra a newe me ne meus Gouelet
 nemed ar wouerc'hes vari ag e mab
 e woan(t) o daou deus e wrancelat
 ag evel ar woas e rede e goat
 ar Prinç Denoblan pa e neus klevet
 de soudardet e neus laret
 c'houi ma soudardet reit peb a scouet
 a me ma unan a rein daouzec
 bis
 da pea an domag o neus groet
 Da bean ar Ker Guengamp komeret.

écriture de Kerambrun.

Ms : lire ariet (comme au vers suivant).

Finale de ce mot douteuse ; faut-il lire : nese ?

D'abord : arg ; sur le g se trouve un c.